

HIRIO AN DEIZ

STAGADENN

DA

VRUD

Perag eur stagadenn da VRUD ?

Red eo degas da zoñj eo bet krouet BRUD, ouspenn 15 vloaz zo, evid embann danevellou, barzonegou, pennadou a beb seurt e brezoneg yah, pobleg, an tosta gwella ouz an hini komzet c'hoaz gand an dud deuet bremañ eun tam-mig war an oad, bet ar brezoneg yez o bugaleaj, hini o labour pemdezieg. Evidom-ni, an dud-se a zo perhenned d'eun teñzor speredel, prest siwaz da vond da netra. Rebechet eo bet deom meur a wech beza kemeret an hent-se, e-leh moulla brezoneg "arnevez". Kendalhet on-eus, avad, o houzoud mad petra ' raem, en desped d'an diouer arhant, d'ar fals-tamallou, d'ar fae taolet warnom, d'ar skoillou a beb seurt.

Hirio an deiz, ha gwell a ze, eur rummad niverusoh-niverusa a vugale, a yaouankizou, a studierien, a zo krog da zeski ar brezoneg, gand sikour al levriou dreist-oll, heb kaoud an eurvad da veva e-touez Brezonegerien. Eur yez nevez koulz lavared, a gemer buhez dirazom. Marteze e vank enni a-wechou an troiou, ar stummou-lavar a rae evidom blazenn dispar ar brezoneg a glevem o kana war vuzellou Leoniz pe Gerneviz. Arabad kaoud keuz koulskoude

d'ar yez koz o vond da vervel, peogwir ema unan nevez oh advleunia war ar heviou dizehet.

Lod euz ar re yaouank, ar re amparta, addesket ganto yez o bro, o-deus mall da zisplega o menoziou hag o zrivliadennoù gand ar benveg nevez-flamm. O halonekaad hag o hennerza eo red. Setu perag en-eus fellet deom lakaad etre o daouarn eur stagadenn da VRUD : HIRIO AN DEIZ. Digorfrank e vo d'an taoliou-êsa, re leun marteze a-wechou a youl-sevel, hogen fromuz hag enno promesaou evid an amzer da zond. Eur seurt lennegez " mond-war-raog " a vezo kavet iskiz gand lod euz ol lennerien, a blije dezo al linennstur dalhet gand BRUD abaoe ar penn kenta. Ra vezint dineh. Er gelaouenn moulet-kaer evel boaz - daoust d'an dispignou braz - e kavint ar yez a blij dezo. " HIRIO AN DEIZ ", tennet dre offset a gousto kalz gwelloc'h-marhad.

Kaset eo bet an niverenn-mañ da oll goumananterien VRUD. Ma fell deoh or skoazella, kasit deg lur da P.M. MEVEL, 14 impasse Breiz-Izel (arabad trei e galleg) BREST - KRP 1499-55 Roazon. Ma ne blij ket deoh or helaouenn nevez, kasit anezi endro, mar plij.

Sekretour ar gelaouenn: A. MERSER, 6 strêd Beaumarchais, 29200 BREST.

MIKAEL MADEG

GANEZ

BARZONEGOU

GANEZ

Be 'dy 'r ots ?

Medru pedair iaith

Os na fedra i ddeud

Yr hyn oy isio

I chdi ddallt

Os wt ti isio

Geiria fi.

Taverny, Gwengolo 73'

DISTRO

Ger beo ar gêr vraz m'on
kaled
divarreg da gared
a zun diouzin a dorr alan
an elfenn
ar housk beo am lez speguz
kuill em debron kasoni
rehuz va spered a gaillar siellet
m'out kuzet pell diouti
arabad soñjal kared beva
arabad beza
soñjal ennout hag er menezioù
re bell emaoù
ma oam ken tost
etrezom hobregon stignadeg kigennoù
o fleg c'hwero brizkleñved ene
e flear houarn dic'hwezet an treñ
balzam latar maro da henou kloz
ar veajerien lugud ne gredont ket
kared
na gredont ket gweled
en o dispourbell a hud euzuz difiñv
ne lezont mann
nemed etrezo an had kasoni
e vleunienn skopa

re bell 'maout
re dener
eviti
evidon
er gêr m'emaon.

Y cerdd unig
 'n dechra ymofyn
 Yno 'i yn ara
 deg
 lle mae dy le a lle fi
 a ni.

Cerdd mwyn
 Dideimlad coch
 Sy ynddo fo
 a fi.

Yna gweld
 Agor fy llygaid
 Dallt am dipyn.

Sgwenu meddwl
 Ac eto gorffen
 Deud sbwml
 A diflasu
 Diflannu
 Dim cusanu.

Magu corff
 A disgwyl
 Nes fod rwbath
 Isio cael i ddeud

Na fedra i nes
 I'r adar a'r haul
 Sy'n mynd ar fin nos
 Meddwl
 Yn lle fi
 Yr unig
 Heb y chdi.

Taverny, Gwengolo 73

POK

Bah ha brein ar spered
 Stohet da vrizveva ha damsantoud
 Treuzveo 'n e sehed
 'N e daol alan a zalhan warno
 Gwastet a vil marzoñj
 N'eus dezo na diluziadenn
 Na dizoñj.

Unan hag unan o tistigna
 Kement brondueñn gig ma 'z on
 Kement blevenn ahanom gwareg
 O kenbalva gwalhet 'n o allazig
 Ha tener o kellida buhez
 Ha sevel.

Bangor, here 73.

GANEZ

Ganez beza dre gement ivinad ahanon
 Ennon froud ha c'hoant o tigousked
 O tislavared lijennaj frealzuz marvel
 Ar geriou-se war va spered sammet ganto
 A glaskan emebarza enno
 O tistera, ha distresa, 'n em zidresa

Dond da veza

Ganez

Didrouz dichal ganet a-nebeudou

Gand kement darn ahanout

Terzienn din-me

Ha dilavar

Dre da zorn ennañ va boud

Dic'hoari, padal buhez

Ha da deod ha da vuzell

Enno anaoudegez ahanon, ha merz

Ha dizoñjal termena, ha barn

Just beza

En em zivugela diouz ar geriajou

Ma oan digenvez pa ne oa dezo

Nag abeg nag implij

En unander

A zilezan

O 'n em gavoud

Ennout.

Bangor, Here 73

O TOND EN OAD

O tond en oad a zen, souezadenn
 Ganet dizampart er vouskriadenn ollved
 Ken tener, flouruz a dener,
 Gand ken deskard ma'z on, ha goustad
 Ha kreñv ha stard pa'z eo a-stign
 An deneridigez diouzom emzegemer
 Dilid, rag hirio, maouez, o tond da vab dit
 En hent ma'z eom gantañ, kengwilioud
 Ema ar bedenn, ar sakramant emzigaledi
 Am laka struj, ha pa oan strij, ken den
 Ha klota, kengan, emlavared
 Dre frapadouigou intret ma kresk
 On dizalhidigez rag me nevezant
 N'eus deiz na deufe din da groui gand diabarz
 M'ema en ankelhadeg.

Te ha me, ken dizampart, ha gwan
 Te ha me gand on hent
 O henel peuzlavar d'eun ni perzieg a ollved.

Bangor, Du 73.

DOLGOCH

Mond d'az kweled
 Diabeg.
 Ha kirieg an dour
 Nerz ha kened
 Gand lazig an heol?
 Eet on
 Bruzinet a reo va spered
 Gand ar pok
 Dizoñjet
 Emgoazet.
 Oes na rwbath yn bod?
 O, na!
 Ha me bremañ
 Kizidig droch
 A-rividig.
 Perag ar zell ?

Bangor, Du 73

OROGELL DIELEVEZ

En divroñsadenn drefu m'emaon o kousked
 E teu tre
 War e bouezig va spered
 Gand kozalkool va gouenn
 Treuzplanedennet he borod
 O tivera a-skourjez a-ruz va hrohenn
 Dre vil gridienn vleo
 Gwriziennou diemleh
 Ar gwez bezo sonn
 Mezo 'n o skeudadeg lagadig amjestr
 M'eo koumoulet doñv donvor
 Va ene dizoñjer
 A-ramp war an azbleo
 O varrenni c'hwezdann
 An daou gorr peurlouret
 En o zerziennadeg hlan abrantet
 E sumfoni vilvouez
 Kement a wez bezo
 Gand ken biziatet m'eo sourr o deliou
 Breugeudet er hrogad mouslavar
 Amgroget a-verk he brroduennou
 Em horv o feunteuna
 Ennout

Treluch a yaouankiz
 Blevennig o tiskourra tener
 A flour huch da vammenn gand embalvadenn
 Tredemarz an ene marellet
 E diougan an diskropadenn Nevez vuez
 Elfennig beurbadelez a-fuill
 En avel daelou a zeliou emvuzellet
 M'ema ahanout ar vezvenn.

Bangor, Du 73

ALKOOL

Ema an evurusted o tiglañvi
 Diouz arigrap bugaleaj kingrop

An alkool
 O spia dre faoutennig

Ar prenestr m'on
 Erh teuz skubet

A-rez menezieg hirgortoz

Ar bleud ahanon

Nevezent vuhez

Flouret a vizied o veza

A zizolo ganez

Kevrin ginivelez ar brizoabl

M'on hoalet kriz

Ken dizoue

Ha chom evidos-te

Rag en em veuza.

Bangor, Du 73

'BARZ VA FENN

Soñjezon red

Didermen

Er zalig vah dialhwezet

Ha dre ze

Goullo

War hortoz ar skoadenn

Ha gouzoud ne vo

Seurt.

Bangor, Genver 74

BARRORGED

Eneblavar on daougorv, ha don
 Gwaret ennom gweadenn weñv
 Da ano ha va ano
 A vousklemm dispourbell
 Stignetoh ahanom etre tarza
 Hag emdeuzi e kelh
 Ar zouezadenn drefu
 Gwan ha gag
 Kement strinkadenn voud
 Peuzdifronkal dizampart
 Gand tener feulz an nerz
 Liezliamm ha landreant.

Bangor, C'hwevrer 74

ADVARZONEG DA ANN

Chom
 Eur frapadig
 Etre va fokou
 Din da deuzi ennout
 Eur pennadig amzer
 Mil bloavezh pe zaou pe ze
 Amzer din
 Da gompren
 Emaout amañ
 Eo te zo amañ
 Ez on me amañ dit
 Amzer eur bokadenn
 A vil bloavezh
 Pe zaou
 Din da weled na ne don ket eun huñvre
 Ar babig lonteg
 O suna da vronn
 N'out ket mamm
 Na c'hoar
 Med te
 Gra eur sacha
 Da guchennig va baro
 'Giz a rees
 Ha gwir eo
 Ez eus ahanon-me

N'eo ket eur vezviadenn lagad ?

Kouskoude n'eus soñj ebed.

Eo.Kouskoude, bremañ 'z eus

Rag bremañ

Leh m'edo difronkadeg amjestr

Eur vougadenn garantez

Ema linennaj stroñsuz

Ar barzoneg paper.

Bangor, Mae 74

BARZONEG DA GLASK KOMPREN

Er menezioù diberhennet

A berlez o dour a doufor

Ez eus eur yeotenn

Ha me euz kêr

'M-eus he haret

Ez eus unan

Diou a zo

Ha pa vez diou

A zouetañs

E ve ken tost nemed

Dilavar

Sekred ar yeotenn

He hened eur grenadenn

He gweled

L'am daoulagad anaoudet

A vloavezioù o gerioù pounner

Ha bresk, ha kreski

A rafe? ma vefe

Displantet alese

Pe mervel

Nemed he harfen dizaon

Pe n'ouzon ket

Rag hirveajet ironig eo

Ennon ar bruzun
 Diêzig a jom
 Euz va ene
 Ha kiga rafe ar gouli
 Bihan 'm-oa digoret
 D'he maga diouz va gwad
 A hañval beza ken dizehet.

Ken tost oa din setu eo chomet
 Peoh diwar-benn heh ene.

Bangor, Mezeven 74

TREUZGEOT

Kenvroiz ker
 Kamaladed
 Deoh-c'hwi, sañset
 Din-me marteze

Barzoniez eun nebeud geriou
 Er yez koz
 A zo din barr va yaouankiz
 Deoh da gomz.

Kemper, Genver 73

Soñj a-peus, Karolina?
 dindannom ar bank o plega
 ha va spered ha lavared
 garmou ar bugel oaz o henel
 blaz ha bloñs, dremm ha bleo
 teod ha dent o tridal beo
 ken ma oe kaset da vuzellou
 diouz va re gand muzellou nevez
 chal amoed ar mor o têri
 chas o chinkana ar vuhez
 Soñj a-peus, Karolina?
 Me 'vad, 'm-eus ken.

Dulenn, Eost 70

Koumoul Kemper o koroll kriz
 kaled ha stard da dal ouz va diweuz feulz
 kreski ' ra dispourbell va spered bestead.

Diyez an estlamm tavet e Karanteg
 frealz holen ar mor o têri diêz e lonka
 ha gwalh va dremm ouz da dristidigez.

Ar gwad em fenn o kaouledi
 a vouge gantañ va zoñjezonou
 a veuze ennañ an emskeudenn gent.

Saint Cloud, Du 70

BUANIJIN

Ha redeg, ha redeg ha m'az pakan
e vo gwelet. Siwaz, deuet din
kerkent ha dirazout 'vel eul lentidigez.

ha kared, ha kared, an deiz ma oe staget
e oa war baper ar gambr diou logodenn
ha mall warno peurzebri or gwele oriadi.

Ha mervel, ha mervel, hag an Inkane gwenn
diouz ar ganaouenn ha lonka ar poziou
ha diglevuz maronad va ronkon diweza.

Bethesda, Du 71

TROH

Den ha maouez ha tost outo ar mor
hag etrezo eul liamm o distag euz ar bed
ne vern dezo e gounnar hag e c'hoarz.

Kell o harantez evel klogorenn êr
Enno diouto evito drezo
ema pennabeg eur beza diamzer.

O lonka 'ra siklud an tonnou braz
ha den n'o gwel, n'o hlev ha n'o divin
nemed ar gwelan a ra pred euz an êr.

Bethesda, Du 71

DIGREDENN

Amañ emañ en noz yen o klask kleved an diglevuz

Me

zo

out-te?

N'on ket.

Amañ emañ o klask skriva va hanaouenn.

E levraoueg Skol-Veur Vangor

Faostudorel 'kreiz ar vali,' penn an uhel

Ez eus eul leor, hag el leor eur bajenn

Hag ar bajenn

A lar

Istor

Eur pok

Hemañ avad n'eo ket va istor din.

En noz yen ma krenan

Eskern yaouank digiget a yenijenn.

Petra 'po?

Netra

Aon

Aon

em-eus

'h afen

re bell

Ha re bell ez on eet.

Ne ran foutre.

Mezo va horv, pounner va ene

Perag anzao?

Lared?

Perag?

Dihet ez on. Ne gavan ken va hanaouenn

Trist ha trist ha trist

Perag?

Didrist

Ya, paotr mad ez out.

Ne jeñch ket kalz a dra.

Perag lared, ya, en noz yen?

Perag santoud, en noz?

Perag soñjal?

Ho chistr, merhed

Ho merhed

chistr

Am laka da zaoubenni

Pegen droll

Ya!

Ho chistr trelonk!

N'on ket mezo

Trist e teuan hepken

Ha soñjal E petra?

O, traou Peseurt traou?

Te 'oar Ran ket, lavar?

Rin ket Perag?

End eeun

Merhed Peseurt hini?

Fri kuriuz, perag, perag, perag

Peleh ema va geriadur?

Eet diouzin

E fons ar werenn

Oh alinenna er vann gand plastr an davarn.

Pez penn ar ragdihun sioul

N'eo ket reuz goañv ha vijil

Ar chistr

Beo-buhezeg

Birvidig o vervi

O virvi

O vir-vi

Diviruz?

Nann, em dihun on.

Fi a

-chal rit ?

Ann? Ann eo? Ann fach ?

Kasoni outi?

Karantez?

Bo! Beu! Be!

Youl ennon, youl, petra 'vefe 'mod-all

Petra

'vefe 'mod-all.

Well

Estren on, merhed

Estren en ho yez

A zeskan en aner

Estren en ho toareou

Digomprenaduz din

Estren

Ha dilavar

N'em-eus netra da lavared

Estren, estren, estren.

Huchal a rafen ar ger

Evel an had kasoni a zo anezañ

Estren. Emdouell?

Ket.

Estren en dihalloud d'ho karoud
 Estren en fisfizians a vez sevenet
 Beb tro d'e uhelvennad

Me ?

Aon

Aon.

Muioh c'hoaz?

Paz muioh evid ar garantez

Ne garan ket.

Petra ra din o fokou keneduz

Roet ken tener, ken êz, ken chentil

O ya, a youl eo.

Me ive eo a youl, kompren a rit, ma'z on

Mezo

Atao ema va spered n'oh ket evid mezvi

O hedal, oh itrika

Nann, 'ma ket ken oh itrika fenoz

O hedal

hepken

An netra diviruz a zegouezo heb mank

Estren eo din da laouenedigez

Am laka da gana

A-hed hent an distro.

Eet e oa ar buz diweza abaoe pell.

An distro

Unan all, o, n'eo ket d'ar gêr

N'em-eus na ti nag oz

Da zivezvi

Yen ar gwele

Yen an noz

Yen va horv

War evez va spered

War evez va huñvre

Estren on, digousk, digredenn.

Perag santoud, soñjal, hiraezi?

Perag geriou?

Ablamour hepto ne ve ket a ganaouenn.

Ablamour

Hepto

ne ve

ket

ken

a jistr

em gwazied.

A-ba-lamour hepto

Pounner on. Ya

Hag e klaskan an noz yen

Etre diou vorenn

Kavoud penn an dihoanag,

Etre koun ha ragzoñj,

N'eus ket outi

Kavoud doare ar garantez

Ouz ar merhed

-se.

Peseurt re ?

Bourouell, me. Pedant, me.

Emwaskuz, me.

Int ? Dizeblant.

Bethesda. C'hwevrer 72

TALISMAN AON

Souezet on

a-wechou

gand perziou heneuz ha dilavar

va buhez

leun barr a yezou

skouarnet va empenn

bazatet, toullbahet, stambouhet

stohet gand o furnez

ha me brell

dreo

souezet e vezan ouz en em weled

o komz

ken dilavar e peder yez

o c'hoari dogan va denelez gwerh

evel taol domino va mamm-goz

m'on diouti drajou a vreizadelez runkun

d'he flijoud bete paradoz va orged

atet, kelhiet ennon

ma oa gwarizi va hendadou gour en o

mouc'hoari

bugel on diouto

heb kan

na yez

na mann.

Tavernyz, Gwengolo 72

DIHUN GORREG

Re ziêz soñjal
 soñjal hag ouspenn ze
 gouzoud petra zoñjan
 diouz kreiz va homz
 kalonenn veo had din-me
 ma tarzo va boud
 dieguz, kled, dispourbellig
 re ziêz ha gouzoud
 vo mouget din va homz
 emlazet en he rivinadenn
 anezi heh-unan
 amlevezon an nebeud am zarz
 gand pell re m'on estren
 gand ar bloaz a deue gand ar zoñj
 gand ar vez ahanon diabeg
 dreistabeg beza dit
 beza ha padal soñjal
 a zo maro din
 istradegou, chistradegou
 me ya goustad a vloaz da vloaz
 va zell emzellet diwel na wel
 netra nemed an-unan er bed a-bez
 na wel netra
 na glev mann
 trawalh din beza ragskrid

rageureud d'eur vro diemgar
 a 'n em lez da doufa
 o koeñvi gorreg ha leun barr
 a hoanag da bedenn
 a netra
 re ziêz emzoñjal
 pa dalvez da velezour da houllonder
 da viken eur frapadig amzer
 ma alanan, amzer din da gompren
 e vin eet, hag echu
 na siwaz na matreze na warhoaz
 netra ouz va gedal
 en o feurbadelez paper trist
 perag rafen, didrugar, emorgeduz,
 ano euz koh va spered
 ha skopou brein ha damgontron
 va danvez buhez paneved e
 kredfen ema va zalarou tu bennag...
 Nebleh
 perag em zizamma evelto
 e meur a leor
 hir
 o konta hed-a-hed o emzistruj
 o laka da reuzieien o zud koz

da anvezidi ar pezh o diglask
 mantret o fri da durgna
 en o lagenn m'int m'om ma 'z eo
 bourdet ar vro
 malloz ruz dezi deom dezo
 gwaz a ze d'an neb a oar
 me netraig o pluenni dousig
 war baper
 a-zivoud va zamm mez n'eo din
 nemed dre va yez
 perag ober ano euz pezh a zo
 trawalh e ve beza...
 Ma hellfem!

Menez Kamm, Genver 73

RAGMENOZ

Ennon ahanoh skeudennou
 Taolennou difiñv mik buhez
 Anezo sañset siellet o zrolinenn
 Eveldon deoh 'n ho spered m'emaon
 Berrmenoz ha setañs da badoud
 Ma c'hoarian c'hoarz paket diskuiz
 'N e wiskad paper liou da vemor din
 C'hoarzigidig ' choman gand va zrohad
 Geriou puill a-fuill diouz va zeod
 Plomm 'n e sa ha me troidelluz
 Int da ahel da bal din m'o gwelan
 Diflach, digemm tra ma'z an me
 Ganto da venoz war e bouezig piltrot
 Dousig pitot o 'n em ziboltreja.

Kastellfur, Eost 73

MERVEL

Trumm

Treuzi eun hent
 Selloud ouz eur plah
 Vleo rouz melen du

Gell

Dezi

O vond gand ar riblenn.

Ew!

Paket.

Da nebeuta vo kaer din

Gwel ar maro

E-giz-se.

Lezneven, Eost 73

SPINADENN VEZA

Hillig hent an ene etre va dent
 M'ema spered goustadig o tresigella
 O jestrigella lugud ha dispourbell
 Skeud war goll emzizammet
 Diouz gweadeg vrizanken ar milvouzell
 Gand re a alanouigou ruz ha berr
 En em gavet divro ha mor
 Estreniekaet da ziruz, frouezenn amzebret
 O koumoula diarnod oablou peuzolleg
 Na verzont ket en o liderez
 N'eus na distro na kendalh
 D'an ene diskeudet
 Dre vil lizer eun aotrou Doue
 O tigeja e lizerenneg
 Peuzintret a varradou tristidig ha lent
 A liou gantañ.

Bangor, Here 73.

BETHESDA

A-rez ar menez sklent malkennet a goumoul sklent
 Dioadet gantañ ar bezo braz etrezo gwiadenn
 Ha mojenn amvedel biz ha teod hag abrant
 O krenigella ganto ar stêr liespoket, brizmouget
 A hlao amdres flour re vered d'ar gêr o ruza
 Gantañ en dour peuzlagad ma red eun heol
 Dioutañ kriadenn ramz ha reud ar brug
 War vrennid ruz diruz war dorr ar grehenn
 milskouarnet a zoue gwiadenn e ratoz
 Gwilhadenn emdonket eo diviz an dudigou
 'N o mentig den rag-krouet asantet da viken
 M'ema eñ dezo, ken hedro, dizoñj ha gwiridig
 Ha gwarizi weñvidig m'ema eñ divarvel
 A diz o bezañs war hortoz
 War vord bered eun dour emdizet a genskeud.

Bangor, Du 73

WAR ZIGAREZ M'EO POENT DIN ECHUI

Edo ar vezvenn
 O prizacha
 Lagadaoueg loued
 Va daelou
 Renket fur
 Ar roll anezo
 Peb a ano deziadet dezo
 Lostennet dindan glao-kelh
 Ar pokou barrc'hoantegez
 Seul gargetoh
 A niverennou
 Ma teuont blizidig iskiz
 Gand ken hir m'eo dihuni.
 Krozadenn houzoug
 Chilp va mouez
 Mann d'ober
 Ingalet an herez
 Ha pa ne ve ket eet an den
 C'hoaz
 Neuze 'vad eo tremen poent.

Bangor, DU 73

GERIADUR ENE

Beo
 Da lavared eo
 Klañv gand an direalegez
 Marnaoniet a vrizc'hoantegez
 Emdarzet a steredennajou
 Peuzlouet
 Ar harhar geriou
 Ma strinkan va fenn
 Devet poelleg
 Gand kiga ra ennañ
 Marzoñj
 Ha kleizenn an tremenet
 Na jom din
 Euz emosiounded va bro
 Kement pennden anezi orin din
 Med stambouh ar geriou
 Na ouzon dezo na ster
 Na gwirvoudenez
 Nemed e teu goull ganto
 Pez a zo din ha dit
 En had
 Ha brein a dermenaduriou
 Din ha dit
 Ha digontrol
 Kemmesk ar zoñj

Har ar ragzoñj
 Kenamzeret ar froud
 Emzinaozet
 Gand re gortoz
 Beza.
 Bangor, Kerzu 73

WAR VA STUDI

O, paotr kêz!
 'Wechou n'eo ket êz
 Tehoud direspont
 Euz eur yez d'eben
 Ro din hirio
 Va geriou pemdezieg
 Eun tañva rin anezo
 Beb tro
 A-raog divlaza.

Droll ar hastad anezo

A gas ganto
 Eun darn ahanon-me
 Ken e teskan beva
 Noaz
 Ha diene

C'hoaz

Ma vijes-te

Noaz ive !

Bangor, Genver 74

POLTRED WAR GIMIAD

Kement all a heriou
 Souchet em fenn
 Aner
 Pa 'n-eus
 Skouarn ebed
 Er bed
 War gleo
 Ouz o gortoz
 Ha koz
 'Teuan
 Krignet a basianted
 En amzer
 Dener
 M'on dezi
 Boued fri
 Debret a uhellegez
 Eur streviadenn
 Souezadenn
 Pennadig
 Eur gwechall
 Mall warnañ
 Mond da get.

Bangor, C'hwevrer 74

BARZONEG ANER

Eur barzoneg aner
 Eo va buhez
 Ha strakell an ene enni
 Ar pezh a zo anezañ
 Difelhadenn eur c'hoarz
 Enk etre krohenn hag ene
 Klogorenn digohennet
 Sounn ha boull
 Emgrignet a veurdez
 Ha trumm
 N'eus ken.

Bangor, Meurz 74

SOUEZADENN

Ha beva reont
 Euz eur galzenn
 Respontou
 Strinket a-vordo
 A-dreuz va empenn
 O walhi diganin
 Blaz dousig ha klouar
 Va meud
 Ruzveo
 A-raog peb goulenn ?

Bangor, Meurz 74

TOSTOHIG

Pokad dit
 flour
 Ha goude-ze
 Stag ouzin
 Troidell
 Ar vlevennig
 Etrezom stag
 Ar barzoneg
 Ha divarhet a engroez
 En em deuzan en trouz
 M'on me
 Dileh
 Hebdout

Landivizio, Meurz 74

WAR GEFRID

Plahig, perag goulenn
 Eur barzoneg?
 Souchet oa don 'barz va spered
 Heb gouzoud din
 Añfin bremañ ema savet
 Tridal gantañ a hellez ober
 E ziskouez hag e zeski
 Evei e koun ahanon-me
 Rag pa ve diaskreet
 N'eus ken 'med eur c'hoarz
 'Kreiz eur vozad ludu
 A zo marzoñj ar garantez.

Sceaux, Mae 74

KEN DIDROUZ ANEZI

C'hoarvezoud goustad a ra ar geriou
 Trouziouigou a darz goullo
 E-barz munudou va spered
 M'ema prest an tavad
 A zegemero kement den a deui
 Dilastezet ganin va lunedou
 Dibikouzet va daoulagad
 Desket dindan eñvor liderez an daouegez
 Digramennet va ivinou
 Ha kribet aketuz bleo ha baro
 Prestig vo dare pep tra
 Echui a rankan skuba.
 Setu. Bremañ e klevan ennon
 Ankenig vroellet an nebeud geriou
 Ar mojennou prevez a rin ganto
 N'eus ken med azeza da hortoz
 Setu a ran
 Chilpuz, trañkil war bouez
 Pevar bloavezh warn-ugent
 Ha miz pe zaou ouspenn.
 Ha pa ne deufe den ?
 Ha dond a raio eun êzennig
 Am haso didrouz da get?

Ne fell ket din, kompren a rit
 Distresa plegig hiraketuz
 Va mousc'hoarz
 Rag, keid zo abaoe
 Setu n'eus ken 'med se a hellan da ober
 Ha pa ve kleze don
 O tabaha ennon
 Evel kleizenn an divuzell o kiga.

Bangor, Mae 74

BARZONEG EEUN DA NESTA

Krignadenn lugud
 War vale fur
 On dihiza e trêziou tro
 Genou ar skol-louarn
 Kenskoaz o'n em zeski
 War bez a zo beva
 Iskiz a dra!
 Dinoaz he zeod
 D'ar gaoz diziwez
 Evel eur boroduz a varzoneg
 Na oar den echui
 Ahanom-ni
 Pa deu da soñj dit
 Kent ha goude dispaka peb tra
 A-greiz beva
 'Peus dizoñjet
 Ar pep reta
 Evel-se ar barzoneg
 Evel-se ar vuhez
 Hag ar frazenn-gelh
 N'am-eus ket lavaret.

Bangor, Mae 74

DA SKWER

War ar voger
 Edo ar skeudenn
 Anezi skopigella gwad
 Serr eun noz
 A deu enni bargedennig
 Liou yen va barzoneg gor
 O 'n em strinka outi
 Chom ' rafen evel ar zebez etre
 Poentig tremen ha termena
 Kouskidig o horella
 Pe heulia va barzoneg
 Pe deuzi enni em-oa greet
 P'ema anezi ar gambr
 A grign va empenn
 Ouz va lezel
 War zihun
 War yun
 Heb gouzoud neuze
 Nemed ganin e koun ahanon-me
 Geriou ar pez a zo eet.

Bangor, Mae 74

KAN

Tri den
 War zigarez beva
 ' Yeas da vale
 War vord o buhez
 Eur verh yaouank
 Oa o kana
 (Alese ano an afer)
 Ar henta a zigoras he divorzed
 Hemañ vougas gand ken laouen e ganaouenn
 An eil a zigoras he halon
 Hag he goulennas da bried
 An trede (êz divinoud piou e oa)
 A zigoras e veg
 Hag a zavas eur barzoneg.

Bangor, Mae 74

POENT DIBAB...

Kant ger
 Lemm stard gren ganto
 Spered an den
 Hepto lagenn varzoñjet
 Ganto o tarza reuz ha krozol

Gwellaenn?

Kastellfur, Eost 73

ar formulenn
 vatematik
 a 'n em skrive
 heh-unan, diouti heh-unan, heh-unan

penn

hag eet e oa

nemed

e chome

da houde war he lerh

Hirochima

Trist e oa ?

Na petra 'ta.

Menez Kamm, Kerzu 71

POENT DIBAB

Dit-te, kamalad

dit-te, ha te, ha te

deoh-c'hwi oll

d'an oll re a zo reveulzi

divirgulennadeg eul linennaj

bizietadenn eur hoz geriadur nul

emstohadenn o spered

dilavar dre forz komz

dilemm dre forz skrafign

a dalvez dispah deoh

da zigarez dua paper

da zigarez 'n em vahagna

ha c'hoari ger ha komz

ha menegi ar hoz yez hast

deoh-c'hwi

en ho kalleg kaled diharell

o 'n em glask, sañset

ho komprenusted boroduz

ho taoliou arnod c'hoari

koukou ha mouchig dall

gand beg ha teod

o tresigella war gaillar

daskrenuz ar palud

a diz e varo du ha yen
 beteg ho muzell
 beteg da vuzell dit-te kamalad
 dit-te ha deoh-c'hwi
 dit-te en ispisial
 va barzoneg ne gomprennez ket
 va yez evel emzispah
 a-peus c'hwitet warnañ
 deoh-c'hwi ar maro
 pe ar c'hoarz
 ma'z out dibasiant ma'z out digomz
 ma'z out di-veza
 gwechall e vo
 ha da gomz ne vo mui anezi
 kamalad.

Menez Kamm, Genver 73

VA MAMM GER

Droll e kavan skriva deoh
 ha ne ouzon ket kaer penaoz lavared
 na petra
 berr vefe ar gaoz kouskoude
 brao eo an amzer du-ze ?
 Ma n'eo ket c'hoaz e vezo, se zo sklêr
 poent vefe ive, evid an eost.
 O, amañ 'h a mad an traou
 fall ar boued sañset nemed
 nemed bremaig da zijuni
 vo gwin mad ha kuign ha segalenn
 ne fuman ket
 arbed va yehed, sañset
 homañ vo fumet
 n'ouzon ket c'hoaz peseurt blaz a vo
 n'eo ket d'an oll vez roet kemend all
 chañs dezo
 rag diwar seurt kovad...Mamm!
 O, mamm. Penaoz 'ma va breur?
 ha cheñch a ra kariad beb sul
 giz a rae?
 Spi em-eus e vo echu d'ar brezel

'raog dezañ mond
 chom a rajo eñ tra ma 'm-oa-me ranket mond
 yen an nozveziou, ya,
 nebeud a dra, avad
 nemed deh da noz e oa yennoh din
 'm-oa ket riou, nann, te oar, fin
 techet e vez an den da vaga soñjou
 en e benn
 tra ma hell
 soñj peus euz an aotrou person?
 Pez a lavare en e sarmon pa oa marvet an tad ?
 Petra lavaro pa...?
 O netra
 ha va c'hoar penaoz 'ma hi ?
 O kenderhel el labouradeg ?
 Ha c'hwi, dreist-oll, va mamm ?
 N'ouzon ket penaoz lavared
 'm-eus aon e hellfen skriva hir
 pa ne vin ket respontet
 re verr eo war va zeod
 pezh a zo da skriva

Eun all a raio
 Evid ar vro
 emezo
 Setu pezh a glevo
 pephini
 er vro
 arabad beza re drist, mamm
 eun tammig memestra
 pa vo eet ho mab
 pa vo
 maro
 evid o bro

Taverny, Ebrel 73

HERE

Poltreja goustadig ar bed war ahel

lenn souba

Intra va spered

Souberh din belbiach

Avel

Vladimir Ilitch Oulyanov

Mab an den

Eñ 'n-eus sellet ha gand ar zell

Eo deuet ruz an hañvez

Hañvouez red an ekonomiez

A-ruz a vili raz

A-rez va frazenn

Graz

Taverny, Gwengolo 73

TESTAMANT

Hag e komzan

er yez

N'eus hepti mann ebed

Din

Da lavared

Dit

Da zibab

Da gana

Da ober

a gari

Gand ma vi

Taverny, Gwengolo 73

DISPAH

D'am hamarad kerneveuriad Tim-"ochenko"
e koun Vladimir Vladimirovitch Mayakofski

Daofñ !

Petra vern ?

Ma'z on dizesk

Amzere

Digomprenuz deoh

Diêz?! Apalata?!

Krewichennet ha tortiset va homz?!

Ran ket forz !

P'ema ganin ar gwir

P'ema ganin ar yez

Anezi ar gomz ho-poa c'hwi

Skarzet, c'hwipet

War zigarez o skoliata

Barrekaad, sevenaad haranguilla

Digand va fobl

Dideodet

En ho lavar a zereadigez arhantet

Skourjezet er riou amreo diweluz

En noazded geriou

M'eo alan ha tan va barzoneg

Gand diougan dispah enni
C'hwi, danvez borod ha ragludu mirdi
En amveure ho tizgwelo
Eneb ouzoh vezo kordenn ha gwareg va geriou
En o genou emzaskoret

Bangor, Du 73

FICHENN ETASIVIL

P'edo c'hoaz c'hwez an talk
 O sikour da vroñsa war va zeod
 Brammou va zouezadenn
 O-doa galvet va niverenn
 Goulennet va zinatur
 (Gortozit ar garbonenn !)
 Evid an alokasionou
 Merket oan luch en o statistikou
 Gwisket lunedou war va fri
 Timbret va breh
 Ha va haset d'ar skol
 M'o-deus desket din
 Lenn, skriva hag eun nebeud traou all
 Diell en o galleg sul
 Dielfenna ha dezrevella evid o faperiou
 Va ment, va fouez, ruzder va horzailenn
 Va hoh, va staot ha va mihi
 Ha blaz gwenn va biz meud hirbasket
 En em niverenna
 Pismiga, treuzjeda
 Ragmuzuliet din va arched
 kement hag ober
 Asuret hag apsolvat
 Ma oa amdrohet va fidenn

Kinklet gand he mousc'hoarz
 O faperennaoueg
 M'ema va foltred
 Notennou va gouiziegez
 Deiziadou va hleñvejou
 Dregantadou ampartiz va micher
 Niverenn bellgomz va zud
 Ano euz relegou va zud koz
 Sifrennou va zi, va hêr, va bro
 (Va yez hebken n'o-doa ket goulennet!)
 Troet da geñver o niveradeg
 Evid eilgontadeg
 An dilennadeg
 O laka en o flas adarre
 A-berz Doue
 Ha me
 Madeg
 (Desket ganin ar gentel)
 Ragjedet va bugale
 Brazkontet va gwreg va harantez
 Ha kement barrorged on-nevez
 Ha gwrez ha kridiennou ar gwele
 Niverennet, liezpoltrejet
 Añfin, 'n em zibab vo gallet
 Skrivit sklêrroh memestra
 An dro nesa
 Bangor, Kerzu 73

Eur vro a gousk dindan va zoñj
 Eur vro, da lavared eo
 Tud, unan hag unan
 Tommoh din o harantez
 Divalavoh din o hasoni
 Krisoh din elfennig vuhez
 O digasted
 Tostohig, pisoh an darempred.

Ha droll ' vefe ?

Gall on bet

Hag e-pad pell.

Bardellet a bersonelez

Siellet a zevenadur

Klañv e unanelez

O hêrbenn a vilionou

A eneoù yud o fas reh

Heñvel poch an eil ouz egile

Gand re a bersonelez red

Evel eur foerell

A dudajou bourdet

En dieub a glaskent

Boud

Heb gouzoud

Rei.

Bangor, Genver 74

SEVENADUR

e koun Cheyened Motovato hag "emgann" Sand-Creek.

Gwallet ha drougsaotret

Kontellet milvahagnet

O empenn evel fankigell

War voteier an den sevenet

A vez torchet gand eur fentigell

O gwad m'eo skritellet gantañ

Meurded kenwerzel o bro

M'int diouennet diouti

Deuet gwenn ha seven

Tropellet aketuz an eskern mud

E sioulder loued ar pajennoù

Dall ar vugale gand

Tarzet m'eo mammenn ar vamm doullgovet

Stlapet e krizboaniou peurbadelez

Mabden emabeget

War ziviz eun taol pluenn

Diberhenn o paperenni kled

Diverket gantañ milionou

A zinifi unan hag unan hag unan

Tud ganet hir ha diêz

Maget ha tamm-ha-tamm o tond

Da zen nemed e vefe

Desket a-walh an alouberien

D'ober gouezidi anezo
 Gwalllahet plaouiet a euz
 Strinket difoutre kalon o gouenn
 Evel banniel ruz ruz
 Ganti ar morhed
 Na zasorho nag ar mousc'hoarz
 Astreset c'hwero a breñved
 Nag an neb e gompren
 M'int pennadig berr a zoñj em fenn
 Ha dirag al ludu
 M'eo druz gantañ va hov
 Mantellet va spered
 N'em-eus ken med va barzoneg
 Evid ober ano
 Digas dezo ? rei ster dezo ?
 Va alan a zenelez
 M'eo dianav din kement oa anezo
 Roget beo ha mouchet
 Er geriou en o azvan a bedenn
 Deuet ganto danvez dizoñj
 Ha seven a-walh ar zaotradennig ruz
 O vond da zu
 Eet da get
 E don va spered?
 Bangor, Genver 74

GOULENNIG

Rit ket bilou
 Pa vezo prest pep tra
 Kit oll en ho kourvez
 Tremen a rin war-lerh
 Da glenka ar geriou
 Niverenna an eskern
 Liva e gwenn kement a zo
 Distaga eun orezonig vrezoneg
 Plega ar bed 'barz va godell
 Nemed dilasteza an ti da genta
 Prizacha ar voestig freuzet
 M'ema ho c'hoariellou
 Ha gedal eur pennadig
 A-raog laha ar goulou
 Nemed e rafen eur fazi
 Rag c'hwi marteze a raio.

Sceaux, Mae 74

BOUROUELL

Gand an henchou atao
 Da glask kevrenna
 Tammou euz va bro
 D'ober anezo
 Eun dra ve brao
 Da glask meza tud
 Gand va misionerez
 Brezoneg brezoneg
 Leun va reor
 Gand an afer
 Gand an henchou
 Na gasont da nebleh
 Gand an diskianted
 Kouskoude e vefe heñvel
 Gand forz petra
 Ral an hini
 'N-eus gellet lakaad
 Da drei war e viz
 Eur bed a-bez
 Ha pa ve Doue
 Ha me n'on ket
 Heb nann na marteze
 (Brao eo gouzoud eun dra
 memestra)

Landivizio, Gouere 74

O klask an hent
 Da vond pelloh
 Ma'z eus
 Ha padal ez an
 Louz on
 Diflaket toud va bleo
 Ha va menoziou a-fuill war va zeod
 Bero gand va haoz
 Ar gasoni aotrouniezuz
 A vudentez
 Er gorventenn desavet
 Ennon
 Ha tamm-ha-tamm o tarza.
 Deus, louz on, med petra vern
 Louz ha strakell
 War achap diouz pez on
 Ken piz a verad dir
 Ennon
 Gand an ezomm
 Euz eur pok
 A vuhez din gand ken mall
 Eo beva
 Med gouzoud
 Ne zinifi netra.

Plouber, Gouere 74

TROIDIGEZ AR PEZIOU E KEMBRAEG

Da betra 'talvez?
 Gouzoud peder yez
 Ma' z on divarreg da lavared
 Ar pezh a zo red
 Dit da gompren
 Ma 'peus ezomm
 Va geriou-me.

Ar barzoneg digenvez
 Krog da houlenñ outañ e-un
 Ennon-me war e bouez
 -ig
 P'leh 'ma da blas ha va flas din
 Ha demm.

Barzoneg flour
 Disantoud ruz
 A zo ennañ
 Ha me.

Neuze gweled
 Digeri va daoulagad
 Kompren evid eur pennadig.

Skriva soñjal
 Ha padal echui
 Lavared sotoniou
 Ha koll blaz
 Mond diwar wel
 Arabad pokad.

Maga eur horv
 Ha gortoz
 Keid na vo eun dra bennag
 A vo red lavared
 Na vin ket 'vid ober keid
 Na vo al lapoused hag an oabl
 Da zerr-noz
 O soñjal
 Em flas-me
 Va-unan
 Hebdout-te.

(Kembraeg rannyezel kenañ eo an hini a zo bet
 desket gand an oberour; evid pezh a zell ouz an
 doare-skrivañ, diwar-skwer Kembreiz zo eo.)

Renner ar gelaouenn: P-M MEVEL.
 Moullet gand I.C.A., 21-23 strêd Jean Jaurès
 29 200 BREST.
 Stagadenn da VRUD nn 50.

Stagadenn da

v - **BRUD**

Nnn 50